

## KANTIK

## Itroun-Varia-Leun-a-C'hraz

## DISKAN

*Itroun Varia leun a c'hraz  
Ar guella mam zo bet biskoas,  
D'ho pugale deut d'ho pedi  
Roit ho pennoz en ho ti.*

1.

Aman e goudor an draonien,  
Hon tadou koz, guir gristenien,  
O deus savet deoc'h eun iliz  
A jom testeni deus ho feiz.

2.

Ho krasou zo bet var ho fenn  
Puill ha saoureg 'vel ar c'hlizen,  
En ho hano, deoc'h trugare !  
O pe sonj omp ho bugale.

3.

Evelt 'ho, pinvidik ha paour,  
Ni c'houlen diganeoc'h sikour,  
Er leuc'h, iaouankis, ha kosni  
Zo goestlet deoc'h, Guerc'hez-Vari.

4.

Er vro-ma, eo padet ar vrud,  
Kenta gras a c'houlen an dud  
Er' leuc'h, ar Verc'hez Leun-a-C'hraz,  
Da zen ebet n'en refusas.

5.

Grasou d'all labourer douar,  
Grasou da bep den e glac'har,  
Grasou d'hor bro, d'hor zoudardet,  
Ha mor reis d'hor mortolodet.

6.

Penn an diaoul zo bet flastret  
Gant ho troad, Guerc'hez eb pec'het :  
Ni oar oll eo hir ho prec'h,  
Miret na vo deomp biken trec'h.

7.

Mam Doue, clevit hor peden :  
Pedit evidomp pec'herien,  
Bremian hag en heur ar maro !  
Eb deoc'h, tremen a ve c'houero.

